

Yaou I a Vizeven 1944 ²⁸

C. AR C'HOENT
(Mab Loiz)
KERIEN

Kenvreur ker,

C' hñui a c'hallfe marteze rei d' in eun tammig sklerijenn. Me 'm eus reseñvet hirio eur werz vrac digant unan bennag hag a gar gwell kuzet e ano mat. Hanvet eo

KLEMGAN DEDIET D'AN DROUIZ TALDIR

He hano gwir a c'hallfe beza

GWERZ DIWAR BENN AR MAQUIS

Pe c'hoaz

GWERZ WARSEJED AR REFRAKTERIEN

HA POTRED AR C'HOAJOU

Savet eo gant eur barz poblus mod koz, en eur brezoneg diwar ar maez, ha kurius bras da lenn.

Nemet avat n' eo ket tener evit konsorted BREIZ ATAD, mesk divesk gant AN DORNAD KOSS BARZED PREST D'HON GWERZA D'AR PRUSS; diskleria ra eo bet tamallet d' an DROUIZED dishenori o flañenn: ha setu perag

DIRAK LESVARN AR C'HOAJOU

A ZO BET DEKRETET

DLECHONT BEZA DISPRIZET

GANT AR GWIR VRETONEC.

Seitek koublad a zo er C'hlemgan, ha sinet eo evelhenn:

SKRIVET GANT OR C'HERNEVAD

A BAROZ LARUEN

EN KOAT PEN-SKOUL-AN-ARGOAT

TOST DA ZANT-NIGOUDEN.

Ha dindan:

25 -5-1944: Yanik Kerboffret.

Ar glorenn-lizer a zo warni kached Post KERGRIST MOELOU-COTES-DU-NORD, 28-5-44.

An adress a zo skrivet mat em hano-me:

Setu aze eun neubeud diskleriadennoù hag ho sikouro marteze da zizolo roudou an hini a ra e varz poblus e mesk Bugale ar Stourm. Ne dle ket beza kement-se a rimadellerien en dro da Laruen, a zo stok da Gerien, ha Kerboffret a zo just mat eur vilajenn a Laruen.

Mar tigasit eur c'helou bennag d' in, gallout
a rit beza sur n'eo ket evit beza diskuilhet
ganin, nemet evit ma flijadut hepken eo e kar-
fen awalc'h gouzout demmdost piou a ra gant
BARZED BREIZ ar peñ n' int ket, da lavaret eo
" Mignoned Hitler," en eul lakat ane er memez
sac'h gant ar re

A ZEUAZ GANT AR BOCHED
D'AR GER A BONDIVI
OR BREIZATAO BENAKET
EN UNIFORM NAZI.

Ret eo da benn lod eus an dud beza trelatet net
a benn n' int erru da zroukbarn evelse ar re
n' o deus mann ebet d' en em rebechi. N' ouzont
ken war biou skei o malloz, gant ma n' int ket
evit c'hoari ouz ar Glazarded. Ouz ar re-ma eo
o defe da glask afer, ha nann ouz tud dinoaz ha
.... dizarmet, rak o hardiegezh ne za nemet eus
ma n' o deus dirak nemet daouarn goulanter.

Esper am eus oc'h yac'h, c'houi hag ho tiegez,
ha n'ho peus ket bet a dregas e Kerloued.

Kevavo, kenvreur ker, ha digemerit ma
sonjou feal ;

Goude Skrid.- Mar deufen da glevout piou eo
merour pe perc'hen Kerbauffret, me a skrivfe ma-
unan eul lizer brac d' ezan evit tremen da
varz ar ger-ze, gant eun neubeut skleriadennoù
war bez ez eo an Drouized hag ar Varzed en gwi-
rione, pere n'int ket da veza mesket gant mi-
gnoned an Alamagne. Trugarekat a refen anezan
eus e rimou, hag alia anezan da welloc'h barn
" e kreiz ar c'hoajou "

Re ar Gorsedd, harpet gant testoni o breu-
deur a Dremor, Kembreiz ha Skozsis, kerneviz
n' o devo ket an disterra ~~XXXX~~ acoun o tremen dirak
e Justis mar tigouez d' ezan ha d' e scort gonid
ar maout.